


Fichenn evit ar skolaerien Evit prientiñ an abadenn



- **Implijout ar skritell** : Penaos e kavit ar skritell ? Petra 'welit war ar skritell ? Deus Petra vo kaoz er filmoù ? E-pelec'h e c'hoarvezo an istor ?

- **Istor 2 blac'h** o tont deus 2 ved enebet, disheñvel tre (bed ar c'hoad / bed kêr)
2 lodenn a zo er skritell - 2 ved disheñvel - Komz deus livioù ar skritell, ar gouloù, an tresañ
Lakaat ar skolidi da geñveriañ an 2 dudenn : Peseurt tres a zo ganto ? Lakaat anezho da ijinañ piv int ? Peseurt temz spered o deus ?
Petra 'vez santet gant ar vugale ? Aon ? Tristidigezh ? Levenez ?

- **Pelec'h ha pegoulz** (gwelout p. 9 an doser pedagogel)

E 1650 e c'hoarvez an istor, e Bro Iwerzhon, e Kilkenny

- ➔ Gwelout war ar gartenn pelec'h emañ Bro Iwerzhon ha pelec'h emañ Kilkenny
- ➔ Komz deus ar brezel etre ar Saozon protestanted hag an Iwerzhoniz katoliked
- ➔ Livañ bannieloù an 2 vro, lakaat anezho war ar gartenn, Petra eo kerbenn pep bro ? Peseurt yezhoù vez komzet en Iwerzhon ha e Bro Saoz? Ha stag eo Bro Iwerzhon deus Bro Saoz ?

- **Ar bleizi**

- ➔ Peseurt sell o deus ar skolidi war ar bleizi ? (jentil, drouk, o vont da get ?, ha gwelet o deus bleizi dija ?) - Implijout pennadoù kazetenn nevez embanet war ar bleizi e Breizh.
- ➔ Sevel poltred ar bleiz (gwelout ar geriaoueg)
- ➔ Komz deus mojenn an dud kalon-bleiz hag ar sevenadur keltiek (mojennoù all anavezet ganto ? Selkied e Kan ar mor ? Mojennoù e Breizh?)

